

Rolland Charles

Lanneaou 862 – Gwerliskin 1940)

Gwerz Ernest Renan, a Landreger. Bet savet e 1903.

Modernnaet eo bet an daore-skriva.

Faziou kemmaduriou a zo ; reizet int bet.

Dindan eur foto euz Ernest Renan :

Setu Dremm gaer an den karet
'Vo e Skeudenn hirie savet,
En Gwengolo, mil nao hant tri,
Dezañ, enor ! gloar ! meuleudi !

Diwar-benn¹ Renan

(N'eus forz peseurt ton hir, 'vel hini : « Ma halon a zo fraillet', gand Proux)

I

1

Breiziz,ma henvroiz ker, tud leal ha gwirion,
Tud kaled ha tud a boan, paotred leun a galon !
Gwir vibien d'ar Gelted koz, ar starta 'oe biskoaz.
Me ho ped, breudeur garet, d'am zelaou eur wech c'hoaz !

2

Ganet ha maget 'n ho touez, Breizad korv hag ene,
Ne glaskan 'med ho lakaad war hent ar Wirione' ;
Test deuz hoh oll labouriou, ho poan hag hoh anken,
Me 'garje 'greiz ma halon rei deoh ar sklêrijenn !

3

Mantret o weled ar Gaou treh d'ar Gwir en or Bro,
An dallentez c'hoaz o ren, ya ! me 'garje d'am zro,
Ho kelenn deuz ma gwella evel ma rez Renan,
Ag an hini ² e komzin deoh gand eonder³ mar gallan.

4

Ernest Renan 'zo unan a'r haerra sperejou
A gement 'zo bet krouet dindan bolz an neñvou,
'N-eus kredet ha 'n em zével dreist kredennou iskiz,
'Vid lared distag e zoñj d'an oll dud a Iliz.

5

Dirag eun den uhel, ar skrivagner dispar !
D'an hini⁴ 'reer enoriou dre oll war an Douar

¹ Diwar-benn : War, er skrid orin.

² : A b'hini, er skrid orin.

³ eonder : eeunder.

⁴ D'an hini : Da b'hini, er skrid orin.

Ha da'n hini⁵ Landreger 'ra goueliou ar haerra,
Kalon pep Breizad a gle⁶ tridal gand lorh ha joa.

6

Ar wirionez 'zo kazuz d'an neb a zo kabluz,
Hag ar gouestla tud o-deus enebourien noazuz ;
Med lezom ar warizi da fonta gand ar vez,
Ha leuskom eur ganaouenn a laouenedigez !

7

Abaoe keid all amzer ma 'mañ Breiz-Izel
Goloet, stag tud hag all, dindan eur goz vantell,
Eo digoulzet he roga 'vid ma welfom ivez
Ar gwir sklêrijenn dispar ! 'ro laerder d'ar vuhez !

8

Hogen, erru e' an deiz, ar mare benniget !
Ma welfom er penn kenta or Breiz vuiañ-garet !
Gras da baotred kaloneg, gouizieg ha desket mad
O-deus digoret da galz spered ha daoulagad ?

9

En penn ar re 'deus poaniet, prezeget ar muiañ
Gand skiant, nerz ha poellder, emañ Ernest Renan,
Eur bugel karantezuz, spered lemm ha digor,
Ganedig a Landreger, ha damdostig d'ar mor.

10

Mab d'eur habiten ar vor, 'oa 'med pemp bloaz, siwaz !
Pa gollas e dad karet, beuzet gand ar mor braz !
Ma n'eo den ken 'med eur hoar hag eur vamm en anken ;
Oll gouestlet d'an dienez goude ker braz gwalenn.

11

Kemeret 'vel-se, bugel, 'oe skoliet ha desket
Gand beleien Landreger 'vid beza beleget ;
Kaset goude deuz o ferz tre beteg kêr Bariz
Da beurober e studi da skolaj Sant Sulpis :

12

Med dre ma sao war an oad e spered aketuz,
O furchal piz er bed-mañ, 'oa rentet ankeniuz !
Dirag geoyer⁷ droug-gwisket, pechou yud ha digar
E galon reiz ha gwirion 'oe karget a hlahar !

13

Dirag pep skañvadurez 'ra izelded an den,

⁵ Ha da'n hini : Ha da b'hini, er skrid orin.

⁶ a gle : a dle

⁷ geoyer : gaouidi.

Chomet abaoe keid amzer en dallentez da ren,
E sante eun nerz iskiz, eur c'hoantegez diroll,
O vounta warnañ da rei sklêrder a-leiz d'an oll !

14

Med penaoz en em gemer, distrei diwar e le ?
N'eo ket dindan ar zae du e raje kement-se ;
Ha tro-dro kêr n'eo selled na wele dirakañ
'Med trubuill ha paourentez ! e-unan er bed-mañ.

15

Koulskoude 'daleg an deiz 'oe skoet d'an douetañs
'Oa gwallvehiet e spered, sammet e goustiañs ;
Rag penaoz prezeg ar gaou ? chom pelloh an hent dall ?...
Biken eun den eveltañ n'hell ober kemend-all !

16

E hoar yaouank Henriette 'oa 'tao dezañ êl mad,
He huzulioù fur meurbed a bouez kalz war e stad,
Hag eun deiz peur-rezolv⁸ e laosk ar zoudanenn,
Hag e tro kein d'an Iliz evid heuill e gredenn.

17

Koulskoude 'ouie ervad e-barz er vicher-ze
'Vije meurbed dizourci en tro-pad e vuhe' !
'Leh o kuitaad, er hontrol, ne wele dirakañ
'Med dienez, poan, hirvoud ! war hent ar bed paour-mañ :

18

Pa oe goulennet outañ, perag 'ree kement-se ?
« Houlennan ket, emezañ, nah ma zoñj na ma fe' ;
Ober gaou deuz ma halon, na deuz Krouer ar Bed ;
Prezeg d'am henseurtes all ar pezh na gredan ket ! »

II

19

Ne glaskin ket displega e vuhez penn-da-benn,
Kennebeud al Leoriou kaer greet dem gantañ da lenn,
En ar re⁹ eo merket sklêr taolenn ar bed gwirion,
An hent eeun 'glefe da heuill kement den a galon.

20

Ne gomzin ket war e zoare dirag tud Vreiz-Izel,
'Med evid diskwel deze pegement eo uhel !
An den stard ha kaloneg 'heuill mouez e goustiañs
'Vid embann ar wirionez, dispont hep tamm drougrañs.

⁸ peur-rezolv⁸ : ger savet diwar ar galleg : youleg.

⁹ ar re : pere, er skrid orin.

21

Na kaerra enor ! hini an den 'zo 'n em ouestlet
Korv hag ene d'ar skiant 'vid vad e genseurted !
A-dro kein d'ar falsentez ha d'an deñvalijenn,
'Vid sacha poblou abaf er-mêz deuz ar vouillenn !

22

Rak tra 'vo an dud a-boan o kas ar peb gwella
D'ar re flour 'ra goap oute heb deveroud netra,
Ar gwir ingal etrezom n'erruo birviken ?
Ha setu perag Renan 'zinahez beleien !

23

Savet ha desket gante ; n'o zouez keid all amzer,
Stummet entre o daouarn da bokad d'o micher,
'Oa ken abeg war o feiz, o lezenn hag o stal,
Ma reas abred fae gantañ chom eno da vragal !

24

N'halle ket chom da deuzi en park ar re falla
A vez dalhmad o krozal war benn ar re wella ;
Al lern o prezeg d'ar yer, ar bleizi d'an deñved,
A drouzont gand a bep seurt ostillou diremed !

25

El leh ma soñje dezañ ne oa 'med vertuziou,
Ne wele ken er hontrol 'med a bep seurt techou :
Santelez ar veleien n'eo 'med eun digare'
Da zerhel ar poblou-kêz hualet dindanne.

26

O stal n'eo ken, aliez ! nemed eur hoz burzud,
Stignet en-giz d'eur wiet¹⁰ war gorre an oll dud ;
O feiz 'med eur gojigell¹¹, livet brao, kaer-meurbed !
O stourm deuz ar skiantchou koulz ha deuz kerz-ar-bed.

27

Ne wele 'med falsentez, dindan pechou treitour,
Goloet gand ar furnez hag eur bern kaoziou flour,
Fals kredennou kemmesket kontrol an eil d'eben,
N'o-deus bet greet a-viskoaz 'med touelli an den.

28

Kaer ha n'eo klask ar wir feiz ne gave deuz outi
Nemed ar skeudenn hepken ; tud leun a vastari,
Oll o prezeg, o hourdrouz, o sponta an dud kêz !
A zalhont dindan o zreid er brasa dienez !

¹⁰ d'eur wiet : ?

¹¹ eur gojigell : ?

29

Gweled a ree sklêr dreist-oll ar gwasa brezeliou
‘Veze ar re ‘darze puill dibenn¹² koz kredennou,
Ha penaoz ar feiz direiz n’oa mad ‘med da vaga
Dizurz, beh ha kasoni en-touez an dud sioulla.

30

Dirag eun heveleb stad diremed ha diroll,
Stignet ‘barz en peb amzer d’eur rumm dre ar bed oll,
E komprenas sklêr buan ma oam er baourentez
Ne oa netra all kirieg nemed an dallentez.

31

E galon wir ha tener, douget ‘vid mad an oll,
Poaniet o weled ar bed keid-all en argoll,
E kredas kemer ar garg da zizalla ar bed,
En eur glask ar wirionez en amzer dremenet.

32

E-barz ar skrituriou koz, d’an neb a daol pled-mad
Eo e kaver ar roudou dezu peb feiz ha pep stad :
Rust ha distumm da genta, tamm ha tamm e weler
O cheñch giz hag o kreski, pentet gand an amzer !

33

Dirag gizioù ken diboell a bouez war an oll dud,
Eun den a ijin ker braz n’helle kammed chom mud ;
Red e oa d’e goustiañs ober unan a zaou :
Lared sklêr ar Wirionez, pe devel war ar Gaou.

34

Bervi ‘ree kement e greiz dirag ar wir frankiz !
Ma oa red d’e spered kaer furchal, klask selled piz,
‘Vid gelloud embann gand nerz ar hredennou nevez
Ah ee da drei ar poblou war hent ar wir vuhez.

III

35

Ar pezh evid ar muiañ ‘skoe war e spered
‘Oa buhez burzuduz Jezuz a Nazaret ;
Lazet en-kreiz ‘tre daou laer gand beleien e vro,
A veve krak ‘stumm d’ar re ‘gemer perz ‘n e ano.

36

Kemennet dond d’ar Jude ‘berz Ministr ar Skoliou,
‘Vid studia war al leh penndalh on hredennou,
E furchas ken aketuz en Istor Mab an Den,
Ma tisplegas e vuhez ‘n eun doare sklêr ha plen :

¹² dibenn : diwar-benn.

37

Ne da bep kaketerez, heb na brud na burzud,
E komz dem deuz an Hini 'garas kement an dud,
N'eo laret sklêr 'benn beva evruz war ar bed-ma'
'Vo red d'an oll 'n em garoud ha dond da 'n em harpa.

38

Eveltañ ivez, Jezuz, e-barz en e amzer,
N'eo laret ar wirionez gand kemend a eonder¹³,
Skoet gand e skourj pounner war an drubarderien
A vezo brao 'n eur ober goap deuz al Labourerien.

39

Ya ! Jezuz 'oa eveltañ arMab 'eneb ar Fall,
Ar Spered gwir o prezeg an hent eon¹⁴ d'ar re all,
A lare kreñv heb ehan, dre leh ma tremene,
Eo red karoud an Nesa 'benn plijoud da Zoue.

40

Jezuz, eur paour, 'oa dreist-oll 'eneb al lorchajou ;
'Eneb ar fals beleien, gwerzerien pedennou ;
'Eneb arveziou direiz, feiz sod, skeudennou ven :
E Lezenn oll 'oa merket don en kalon peb den.

41

Ar rouantelez dispar ! ag an hini¹⁵ e komze
'Zo amañ war an douar er peoh, er garante',
Pa virfom e hourhemenn dre or madoberou,
'Ha nann o chom moredet da zrailla pateriou.

42

Allaz ! eul Lezenn ken sklêr, roet dem gand Jezuz
'Zo flastret ha dispennet gand eur bern tud noazuz,
'Deus steuet war he gorre fals kredennou iskiz !
'Vid harz an hini wirion da zond ken war he hiz.

43

Hogen evid kement-se eo e rez ar Breizad
Buhez Jezuz a-nevez 'vid an dud eon ha mad,
Ma reno en pep kalon e gomzou kaer ha fur,
Ha ma kemero an oll e furnez da wir stur.

44

Despet d'ar gojigell vrao, pentet dem war he stadn
Jezuz n'e' ket eun Doue ; med eun den eon ha mad,
A zo bet merzeriet gand tud fall e amzer,

¹³ eonder : eeunder, en eun doare eeun.

¹⁴ eon : eeun.

¹⁵ ag an hini : a b'hini, er skrid orin.

Fals-beleien 'vel on re, o veva deuz gevier.

45

Mirom e lezenn, breudeur, meulom oll anezañ !
Ha rentom gwir drugarez d'ar Breizad braz Renan,
Ar henta spered uhel 'n-eus kredet displega
E vuhez gand gwirionez, penn-da-benn 'vel ma oa.

IV

46

Lezom kement a labez da Jezuz e ano,
Da grozal 'eneb Renan gand o bojigenno'¹⁶ ;
Daoust d'an oll dekriardeg¹⁷, deuz o zeod bulumuz,
Renan 'oa en o heñver bepred madelezuz :

47

En peb leh e prezege ar mad, al lealded ;
Gwir doujañs d'al Lezennoù evel ma'z eo gleet ;
Gouzañvi kredenn peb den, frankiz d'al lavariou ;
Setu an aliou fur 'oe war e vuzellou.

48

'Leh on beleien biken ! krenvroiz, klevit mad !
Ne houzañvont tanfoeltr tra pa ne vez ket d'o grad ;
D'o oll burzudou fentuz (!) eo red kredi war-hed,
Hag hini ar muiañ kabluz gante dirag ar bed :

49

Soñjit en amzer euzuz pa oent on gouarn,
El lahadegou spontuz ! dre dan ha dre houarn !
An dud a-vern distrujet ! pa vijent ket a-du ;
Gwasa amzer 'oe biskoaz 'oa dan¹⁸ ar veneh ru' !!

50

Soñjit e felle deze bepred on stleja 'vel gwechall ;
C'hweza en ano Jezuz, brezel, bosenn, tangwall !
Rag int ne glaskont kammed 'med maga kasoni ;
Lakaad an dud 'vid *ar feiz* (!) 'vel chas d'en em zebri !

51

Mammenn an oll dizurziou, ar spont hag ar glahar !
A zo en peb feiz direiz hadet war an douar ;
An dud kêz en em zrailla 'balamour d'o doue !
Goude biskoaz rumm aneze ha n'e-neus gouezet petra 'h e' !

52

¹⁶ : bojigenno' ? (euz "baoz" ?)

¹⁷ dekriardeg : ? (euz ar galleg ?)

¹⁸ dan : dindan

Ar gwas a tud a-viskoaz, sellit mad en-dro deh¹⁹
Eo ar re 'fell deze gouarn'n e ano e peb leh :
'N eur lared dem 'n em garoud an eil hag egile,
E karfent gweled maro 'neb na gred evelte.

53

Daou zen a ziou feiz kontrol 'zo tre evel ki ha kaz ;
Beleien pep hini ne zo²⁰ kalz diotoh c'hoaz.
Dalhmad en beh a bep tu ma'h aint deuz en em daga
O klask goud 'n hini²¹ aneze 'n-eus an doue sota !

54

Sellit deuz on beleien, ar gounnar en o hreiz,
Prest da deuler²² dir ha tan en pevar horn a Vreiz.
Ar malloz en o genou ! war skeudenn-zen Renan (!)
'Vo da viken, 'despet deze, enor braz ar vro-mañ !

55

Pa 'mañ oll skrivagnerien, stlabezet dre ar bed,
Ar sperejou uhella, ar haerra tud desket,
O kana meuleudiou d'ar gallouduz Renan !
On zammou koz beleien a strink bulum warnañ !

56

Savet e vo eur halvar deuz o ferz en Treger
'Vid enebi, stoum bepred ? en tudigou dister !
Goude goud ma tistakfe o Hrist, beo, deuz o hroaz,
E skofe warne 'darre, gwasoh evid biskoaz !

57

Lezom an du pennfollet (!) da dremen o imor ;
Saludom e skeudenn-zen ; enorom e vemor ;
Kanom stard e vertuziou ; meulom e vadelez ;
Ra vo e spered ganem da virviken jamez !

V

58

Meulom ivez, mignoned, rumm re Hlaz Breiz-Izel,
O hazetenn *Breiz Nevez* « A-raog ! » bete mervel !
O-deus savet e skeudenn war dachenn Landreger ;
A ro dem nerz ha skoazell da gerzed gand poellder.

59

En penn ar Vreuriezh 'mañ paotred stard an Arvor !
Réveiller, Ribot, Dayot, Gwyess, er penn a enor ;
Gwillerm, Kerguezek, Armez, Baudet, Troadeck, Ar Braz,

¹⁹ deh : deoh.

²⁰ ne zo : n'eo

²¹ 'n hini : p'hini, er skrid orin.

²² deuler : daol.

Bott, Mauger, Bail, Nikol, Paj, Baudour, ha kalz all c'hoaz.

60

Ha deuz tu ar Hallaoued, tud vrudet ar muiañ :
Loubet, Combb, Chaumie, Robert, Franz²³, Berthelot, Pelltan,
Boyer, Jeffroy, Beranjer, Jakob, Eon, 'oar den ped !...
Hep komz deuz ar broiou all a bevar horn ar bed !

61

Meulom eta, gwir vreudeur, asamblez, war eun dro,
Ar gwir republikaned a glask oll mad ar Vro ;
A ro dem deskadurez, frankiz, peoh, esperañs !
A ra en-keñver ar bed, enor d'or bro gaer Frañs !

62

Skeudenn-zen Ernest Renan, war douar an Arvor
A verk nerz an ideou ! Loreenn ar viktorez
Deuz kerz-ar-bed war *A-raok* ! 'trezeg pal ar frankiz !
Ar *wirionez* 'n he braster ! dreist penn ar *Gaou* iskiz !

63

Enor da gêr Landreger ! ha nevez e hanet !
'Vo dre oll ivez gantañ da virviken brudet !
'Vel eun tourtan lugernuz pa laosk e sklêrijenn
'Zach kalonou dianket deuz an deñvalijenn.

64

E skeudenn-zen a vezo skwer veo d'on bugale
Da genderhel eveltañ war hent ar wirione' ;
Hag eun deiz pa vefont oll kelennet en hent mad
E tougfont dezañ d'o zro trugarez ha mennad.

65

Prestig, pa yel' e ludu d'ar Panthéon a hloar !
'Vo greet dezañ adarre goueliou kaer ha dispar !
E ano kaer, divarvel ! a lakaio bep tro
Da dridal a levez ! on boul, deg mil leo dro :

66

Garanet e-neus warni, eur arroudenn ken don,
Gand e vouez hlan ha nerzuz, 'h a beteg ar galon !
O tigeri d'ar spered mamennou a sklêrder,
A ziabenn d'ar poblou teñzoriou meurbed kaer !

67

Eñ 'zo unan ar postou deuz al Lezenn-Neve',
'Vo eun deiz hini an oll, (ar bobl humanité),
Pa vo treh ar skiantchou, deut an *Unvaniez* ;
Ar gwir lealded o ren ; brasoniou er-mêz !

²³ Franz : notenn gand an oberorur : Anatole France.

68

An oll dud 'vo 'vel breudeur dindan ar memez fe' :
Frankiz, labour, deskamant, peoh paduz, karante'.
Ar poblou en evrusted a gaso da bourmen
Ar bern fals-doueou ven, kirieg d'on flanedenn.

VI

Parenthèse

69

(N'eus bet den war an douar, na birviken ne vo ?
Da gompren 'barz en *dra* gaer a grouas kement 'zo ;
Neb a ro eur stumm dezañ 'vid treisa e genseurted,
Eo c'hoaz ar muiañ kabluz dirakañ war ar bed.

70

Neb a gemer perz ennañ, 'n eru lared petra 'h e'
A bella outañ bep taol e-barz en dallente' ;
Rag e vignoned vrasa, p'eo eñ ar gwir spered,
Eo heb doan ar sperejou muiañ sklêrijennet ?

71

Ober a reas mad pep tra ; roet 'n-eus da beb den
Eur goustiañs her barno er bed-mañ pe 'n eben²⁴ ?
Eur spered da weled sklêr ; Skiant dond²⁵ war gaerraad :
Med bikoaz den 'n-eus karget da brezeg war e stad ?

72

Gwelit, an oll dud a boell, a feiz-vad, 'vel Renan,
Eo an dud muiañ gwirion, an tosta-kar dezañ ;
'Ra en peb leh o dever, hep klask penta e stad ;
Grit evelte, bezit fur ! tud leun a galon vad.

73

War on zamm boul bri, kredit, 'benn ma'h ay mad an traou,
An tosta d'ar wirionez 'rank trehi war ar gaou ;
Da viken 'vo beh ha chao tre ma vem en hent dall ;
Pa vem oll sklêrijenn 'vo greet gwelloh ingal !

74

Hogen, eun deiz 'erruo, 'vel ma 'm-eus deoh laret,
'Vefom oll er baradoz, breudeur al lealded !
Pa 'mom oll akizitet spered ar wirionez,
A zo ar vammenn outañ er skiantchou nevez.)

Fermée

²⁴ 'n eben : 'n egile.

²⁵ dond : ? "deut" ?

75

En deiz-se, Ernest Renan, 'vo uan a'r henta,
Gand Fourier, Proudhon, Voltaire, Hugo, Komt ha Zola ;
Deuz an dud muiañ karet, brudet, meulet meurbed !
A rumm da rumm da houde, tre 'vo tud war ar bed.

76

Pebez lorh, pebez enor ! da vugale Arvor !
Gweled unan deuz o re 'barz en penn an istor,
War gwir Leor kaer peurbaduz doare tud an douar !
'Vo dre-ze warnañ eun deiz en evrusted dispar !

77

Savom eta or moueziou hirie, braz ha bihan,
Da gana meulodiu d'ar Breizad braz Renan !
Unan a bostou ar bed war hent kaer ar Furnez !
Kalon eon, spered gwirion, den leun a vadelez !

78

Dougom dezañ trugarez, mil mennad, mil bennoz !
Ha kanom oll e vraster hag en deiz hag en noz ;
Kemerom hen da baeron an eil hag egile,
'Vid ma reno entrezom ar peoh, ar garante' !

79

Gand eur gwir anaoudegez, savom or sperejou
Da gana enor dezañ ! a nerz or halonou !
Diskwellom sklêr d'ar bed oll, a sko warnom e zell,
Penaoz eo divun bepred paotred stard Breiz-Izel !

80

Kanom 'ta gwitibunan, kanom stard dibouez-penn !
Enor da Ernest Renan er bed da virviken ! !
Ya ! kanom skiltruz ha yê ! e-barz en peb amzer,
« Gloar ! Enor ha meulodi ! da Renan Landreger ! ! »

Ch. ROLLAND

Gwerliskin, d'an 23 a viz Eost 1903.